

362

Ar Vestrez abandonet.

(469, suite)

Var ton: Une jeune bergère.

Ur vergerennic yaouanc,
 Beuzet en he daelou,
 D'an ecleo, var bord ur stanc,
 A gontê he c'hlemaou.
 Ah! pell eus ur faus mignon,
 Na baouezân quervel,
 Goude ma cass gantân va c'halon,
 Ne meus nemet mervel. (470)

Hac ennes eo ar c'hoadic
 M'er clêven o cana,
 E pini sioul, goustadic
 E voamp qer bras ha tria?
 C'houi, parqer ha prajou,
 Hac a dost hac a bell,
 A za da veza leuy a fleurjou,
 Ha me za da vervel.

Pequer douçic e vije,
 Pa rê din-me al lez!
 Pequer coantic e comize
 Demeus e garantêz!
 E vit donet d'ann goapât
 E seblantê fidel:
 Perac en boa ur galon qer mad, (471)
 P'am laqa da vervel?

Goechal n'en em occupe
 Nemet da blizout din;
 Dansal, cana rê neuze,
 Quiê voa vel ur pincin.
 Gant merc'het all ve bremâ,
 Hac e têt'h ouzôn pell:
 Mer gleo, allas! gantô o cana,
 Pa ra din-me mervel.

Deus eta d'an dachennic
 D'am gulet en daelou;
 Eno poe va c'halonic
 E presang an êvou.
 Ah! ma na finv qet neuze
 Da hini, infidel,
 Adie, des faus, na chom ganeme
 Nemet esper mervel. (472)

Un deiz a ell aruout
 Ma na gari mui qen;
 Neuze me raî did santout
 Qeuz ha chagrinou ven.
 Va squeud dre oll a veli,
 Clêm a rin hep tervel:
 Hirvoudi ri qeit ha ma veri,
 D'am beza grêt mervel.

Fin an Drivet Tom.

(Vol. III, p. 469-472.)
 6 str. numérotées.